

# Bageal-dre-lien : un Dro arall get an tolpad-kêrioù

Akipaj Mor Bihan Gwened – Breizh Cola, get Solune Robert, Riwan Perron, Louis Flament ha Charles Dorange, é tont en-dro evit ar redadeg Diam 24, c'hoant gounit gete.



© RIBLANC

**Evit ar pempvet gwezh doc'htu e vo lodek an tolpad-kêrioù en Dro A-ouel, kement ha derc'hel da sikour merdeidi yaouank ar c'hornad da vont àr vicherelaat. Er blez-mañ e vo chañchamantoù avat...**

E 2015 en doa divizet an tolpad enfrediñ merdeidi yaouank ag an tolpad da redek mor evit Tro Frañs àr vag-dre-lein. A-c'houde deroù ar raktres e oa aet ar maout get an akipajoù savet get an tolpad er rummad amatourion e 2015 hag er rummad yaouank e 2017, ha div wezh e oant bet trec'h er renkadur hollek e 2016 hag e 2018. Get ar raktres taol-lañs-se e oa bet roet tro da veur a verdead d'ober o hent àr ar vicher hag estroc'h evit en akipaj. Ar wezh-mañ e vo kaset an team get Solune Robert ha Riwan Perron, bet « re c'hlas » an akipaj kozh. Kemer a raint penn ar stur er rummad amatour ha mennet-kaer int evit ar c'houlzad-mañ : « C'hoant hon eus da chom dirak atav é stourm a-enep an akipajoù gwellañ, evel ma oamp daet da benn d'ober a-vareadoù er c'houlzad tremenet. Dav eo dimp klask bout reoliekoc'h ha tapout fiziañs ennomp-ni hon-unan. Disoc'hoù ar gourdonadegoù hag ar redadegoù kentañ a ro kalon dimp. »

Ur chañchamant arall : ur c'heveller nevez zo. Bremañ emañ skoazellet an tolpad-kêrioù get ar c'hevredad morbihanat Breizh Cola. N'eo ket dianav bed ar bageal-dre-lien d'an embregerezh, en he fenn Stéphane Kerdodé, pa ro skoazell da Gildas Mahé evit kevezadeg ar Figaro dija. « Àrlane em boa sellet a-bell doc'h disoc'hoù akipaj an tolpad-kêrioù e Tro Frañs àr vag-dre-lien. Goude bout kejet get Solune ha Riwan em eus komprenet e jaoje a-walc'h o raktres doc'h hon engouestl àr tachenn ar merdeidi. Evidon e oa poellek keveliñ get Mor Bihan Gwened a vourran bras anezhoñ pa'h on é chom eno. »

Ur skipailh nevez ha gouelioù nevez : akipaj an tolpad-kêrioù a vo da heuliiñ en Dro A-ouel a vo dalc'het adal ar 5 betek an 21 a viz Gouere. ♦

🌐 **Evit gouiet hiroc'h :**  
[www.golfedumorbihanbreizhcola.bzh](http://www.golfedumorbihanbreizhcola.bzh)

## Berr-ha-berr

### Chañchet eo daveennoù al Lec'h-titouriñ emrenezh

Chañchet eo daveennoù al lec'h-titouriñ emrenezh (EAS kozh) hag a ro skoazell d'ar re oc'hpenn 60 vlez ha d'o zud-kar evit o hentad buhez. A-vremañ e c'heller pellgomz d'ar servij d'ar 02 97 29 20 90, etre 9e ha kreisteiz hag etre 2e ha 5e (nemat d'ar Meurzh vintin) pe kas ur postel da [accueil.ea@aps56.org](mailto:accueil.ea@aps56.org).

Degemeret e vez an dud goude goulenn emgav e Gwened, Sarzhav ha Gregam. Menegomp ivez ec'h eus burevioù-pad en Elven, Plougouvenen ha Baden.

🌐 **Evit gouiet hiroc'h :**  
[accueil.ea@aps56.org](mailto:accueil.ea@aps56.org)  
**02 97 29 20 90 - deizioù, eurioù ha lec'hioù ar burevioù-pad er magazin 360 enlinenn.**

### Ur raktres embregerezh ? Lakit hoz anv er c'horerez Nov'Activ

Evit ma c'hello pep unan arnodiñ e soñjoù hag o lakat da zont da wir, ec'h eus bet savet ur programm harpiñ berr get an tolpad-kêrioù dre e c'horerez Nov'Activ. Evit bout lodek er rummad kentañ, lakit hoz anv betek ar 6 a viz Gwengolo e [www.entreprendre-golfedu-morbihan-vannes.bzh](http://www.entreprendre-golfedu-morbihan-vannes.bzh).

## Adimplij : dont da benn da chom hep kalavriñ

Zero Waste France, harpet get an tolpad-kêrioù, a ginnig un dae da dud an tolpad. Dre an Dae tra nevez ebet e klasker lakat an dud d'adimplij traoù o deus servijet dija e-lec'h preniñ traoù nevez. Dilhad, gloestraj, benvegoù tidredanerezh, traoù da ginkliñ an ti, levrou... an holl draoù ag ar vuhez pemdez a c'hell bout adimplijet. Un digarez da welet ec'h eus karg a draoù a c'heller gober hag a zo emsav evit ar vuhez lec'hel : feurmiñ, preniñ traoù eildorn, prestiñ, adkempenn, roiñ... El lec'hienn riendeneuf.org ec'h eus ur renabl ag an traoù a c'hell an dud gober e-lec'h preniñ traoù nevez. El lec'hienn-se ivez e c'hell an dud priziñ pouez an danvezioù arboellet bep tro ma prenent un dra eildorn, ha seul taol ma aodaozont pe ma adkempennont un dra bennak... Mod-arall e c'hello an dud ranniñ o skiant-prenet dre ar rouedadoù sokial ha goulenn

resev ul lizher-doareetaat da ouiet petra zo nevez get an dae ha lenn alioù fur evit dont da benn ag o fal.

E Frañs a-bezh e kaser an oberiadur-se endro, tost 20 000 a dud o deus kemeret perzh ennañ dija ha 1 781 tonenn danvez kraï zo bet gelllet arboelliñ dija a-c'houde penn-kentañ ar blez. En hor c'horn-bro emañ a-barzh al lusk evit chom Hep kalavriñ a oa bet roet lañs dezhañ get an tolpad a zo labelaet tiriad Hep lastez, Hep kalavriñ hag a zo an tolpad-kêrioù kentañ a skoazell an oberiadur-se e Frañs. Oc'hpenn-se e faot dezhoñ mont pelloc'h hag aoziiñ atalieroù ha gweladennoù, adal miz Mezheven betek miz Gwengolo, evit sikour ar berzhidi ag an tolpad. ♦

**Evit lakat e anv : riendeneuf.org**  
 ☉ **Evit gouiet hiroc'h : 02 97 68 33 81**  
**pe defizerogasillage@gmvagglo.bzh**



© mairie de Séné

Evit chom hep kalavriñ ec'h eus atalieroù « repair cafe » ma c'hell an dud deskiñ adkempenn traoù asambli get dreserion a youl vat.

## Pa gej ar varzhoniezh get an annezidi

Séverine é, aozourez barzhoniezh a vremañ, a yelo da vale dre gumunioù Gregam, Brandevi, Kolpoù, Lokeltaz ha Lokmaria-Gregam, d'em gavouet get an dud. En annez e vo adal miz Gwengolo betek miz an Azvent (Kerzu) 2019 evit luskiñ atalieroù skriviñ dreist-holl. An abadennoù-se a vez kaset da benn a-barzh « ar gevrat tiriad lenn » a dalv da sachiiñ evezh al lennerion, an dud n'anavont ket bed al levrou pe an dud nammet.

☉ **Evit gouiet hiroc'h : www.golfedumorbihan-vannesagglomeration.bzh**

## City pass : Kinnigoù brav evit gweladenniñ ar vro

Evit ma vo aesoc'h deoc'h gweladenniñ lec'hioù n'heller ket tremen hebiat dezhe er vro ha gober ho mad ag obererezhioù pe pourchasoù servij e prizioù marc'hadmat (evit an treuzdouden, ar mordreizhadennoù, ar parkoù dudi...), e kinnig ofis touristerezh Mor Bihan Gwened Touristerezh ur City pass 24 euriad, 48 euriad ha 72 euriad.

Get ar gartenn niverel-se e c'hello ar weladennion bout ur bochad distaloù àr o hentad gweladenniñ, e-pad un deiz, daou zeiz pe tri deiz, hervez ar pass choazet. Evit lod e vo un dro d'em leuskel da vout ambrouget dre al lec'hioù kinniget er pass (oc'hpenn 20 lec'h n'heller ket tremen hebiat dezhe) hag evit lod arall un doare da bourmen dre ar vro e prizioù izeloc'h ha hervez o c'hoant. Get ar pass-se ec'h eus meur a zistaol kinniget get an tolpad-kêrioù evit ar mordreizhadennoù en hañv àr vourzh un Treizhour Bihan (ur mont-dont digoust àr vourc'h pep Treizhour) ha dre ar rouedad treuzdouden boutin Kicéo (un devezh digoust).

**Evit gouiet hiroc'h ha mirout plasoù, goulennit get burevioù titouriñ an douristed pe it da welet el lec'hienn [www.golfedumorbihan.bzh](http://www.golfedumorbihan.bzh).** ♦



# Kreñvaet e vo rouedad linennoù tro-kêr Kicéo en distro-skol

**Pep distro zo un digarez da rouedad treuzdouden an tolpad-kêrioù da ginnig gwellaennoù en e servij. Er blez-mañ e vo laket muioc'h a dizh get Kicéo pa vo kreñvaet muioc'h e rouedad linennoù tro-kêr, evit ma c'hello muioc'h a dud mont get ar bus.**

Adal miz Gwengolo e vo fonnusaet e rouedad get Kicéo, dreist-holl àr al linennoù en eil hag en trede kurunenn. Er pleustr e vo muioc'h a veajoù bemdez àr al linennoù bus niv. 21, 22, 23 ha 25 a zeservij kumunioù Baden, ar Bonoù, Plougouvenen, Aradon, an Arvor-Baden, Surzhur ha Gregam.

Get ar mem pal, an tolpad-kêrioù en deus grataet, asambl get Rannvro Breizh, kreñvaat ar c'hinnig àr al linennoù kenveret get Breizhgo hag a zeservij douaroù Kolpoù, Lokmaria-Gregam, an Drinded-Surzhur, Sulnieg, Trevlean, Plaodren ha Stêrwenn (BZ 3, 8, 9 ha 11). Er mod-se e tiskouez an tolpad-kêrioù e vennantez da ziorren ur c'hinnig treuzdouden kempoell dre ar vro a-bezh, pa vo postet tost ur milion a euroioù oc'hpenn evit astenn ar c'hinnig-se.

Ag an emdroadurioù-se e kemero tro Kicéo evit kinnig un servij sklaeroc'h a-fet an hentadurioù, get euriou hgozik digemm ag al Lun d'ar Gwener etre miz Gwengolo ha miz Mezheven. Diàr vremañ hag àr bep linenn e vo da nebeutañ c'hwec'h beaj mont/dont adal/trema Gwened bemdez e-pad ar sizhun (adal miz Gwengolo betek miz Mezheven) ha pemp beaj mont/dont d'ar Sadorn hag en hañv. Ar prizioù a chom evel ma oant.

## ■ BUSOÙ DIGOUST EVIT SIZHUNIAD AN DILEC'HIIÑ

An dud a garo esaeiñ mod nevez ar rouedad busoù a c'hello en ober aes etre ar 16 hag an 22 a viz Gwengolo.

E-pad Sizhuniad europat an dilec'hiiñ e vo laket digoust implij busoù ar rouedad get an tolpad-kêrioù.

E-keit-se ec'h eus raktreset meur a obererezh e kumunioù an tolpad evit roiñ da ouiet d'an dud ec'h eus diskoulmoù arall evit chom hep implij e garr-tan. Aozet e vo oberoù marilhañ evit chom hep bout laeret e velo hag abadennoù « diskar-pennoù » kement ha diskar ar raksoñjoù a c'hell bout a-zivout ar c'henwetriñ. ♦

## Hag en hañv-mañ

Euriou all a vo kempennet get Kicéo adal ar 6 a viz Gouere betek ar 1añ a viz Gwengolo. Emaint el lec'hienn, en arload Kicéo hag er sturlevroù Kicéo (a c'heller tapout el lec'h Infobus pe en ti-kêr). Evit an hañv ivez e kinnigoù Kicéo teulioù-treuzdouden da implij koulz er bus hag er vag àr al linenn Sine-Barrarac'h/Gwened-Koulev. 2,50 € ar mont hepken ha 4 € ar mont-dont. Hag evit prientiñ an distro-skol e vo digoret an enskrivadurioù adal fin miz Mezheven e lec'hienn Kicéo, en Infobus hag e pennlec'h Kerniol.

🌐 **Lec'hioù-gwerzh e [www.kiceo.fr](http://www.kiceo.fr) Muioc'h a ditouroù a-ziàr sizhuniad an dilec'hiiñ er magazin 360 enlinenn.**



*Kreñvaet e vo e rouedad linennoù tro-kêr get Kicéo ha kinniget beajoù mont-dont div pe teir gwezh aliesoc'h, hervez ar c'humunioù.*

## BeKT ha SMeK : un enklask foran unik

Etre kreiz miz Eost ha kreiz miz Gwengolo e c'hello an annezidi kemer perzh en enklask foran unik evit ar BeKT (brastres evit kenstagged an tiriad) hag ar SMeK (steuñv monedone e kêr).

E mod-se e c'hello neb a gar lâret e soñj a-ziâr ar raktres terkiñ displeget er BeKT ac'hann da 2030 hag a-ziâr ar raktres monedoneoù (SMeK) evit an tolpad.

An teulioù a c'heller lenn enlinenn e lec'hienn Internet an tolpad-kêrioù ha gellat a ray an dud skriviñ evezhiadennoù pe notennoù enlinenn. Mod-arall e c'heller kemer perzh dre lizher pe rag-eeun get unan ag ar gomiserion-enklaskerion a ginnigo prantadoù emgav. Deizioù, eurioù ha lec'hioù ar prantadoù-se zo notennet e lec'hienn Internet an tolpad-kêrioù. ♦

🌐 **Evit gouiet hiroc'h** : [www.golfedumorbihan-vannesagglomeration.bzh](http://www.golfedumorbihan-vannesagglomeration.bzh)

## Deomp d'ar poull-neuñval !

E-pad an hañv e vo tri foull-neuñval etrekumunel digor d'an holl : poull-neuñval al Loc'h e Gregam, Vanocéa e Gwened (poull ha lec'h fitness) hag Aquagolfe e Surzhur. Poull-neuñval Kergadoù a vo serret avat. Eurioù ispisial mizioù Gouere hag Eost a c'heller lenn e lec'hienn Internet an tolpad-kêrioù (diwallit doc'h ar serradurioù teknikel adal ar 1añ betek ar 5 a viz Gouere e Vanocéa ha betek ar 15 a viz Gouere e poull-neuñval al Loc'h). Stajoù neuñv zo kinniget e-pad an daou viz-se ivez.

An enskrivadurioù evit ar c'houlzad 2019/2020 a vo d'an 31 a viz Eost e poull-neuñval al Loc'h, adal an 2 a viz Gouere e poull-neuñval Kergadoù, adal an 8 a viz Gouere e Vanocéa. ♦

🌐 **Razh an eurioù digoriñ er magazin 360 enlinenn.**



## KANNADOURION EVIT GWELLAAT AR MONED AES DA DI AN DUD A VICHER

Evit sikour an dud a vicher ag ar c'hornad da lakat o savadurioù en amen d'an holl (tud dalc'het en o c'herzhed, tud nammet, familhoù get ur vountell peotramant tud en oad...) e vo enfredet kannadourion gant an tolpad-kêrioù, e kenlabour get ar Stad. Karget e vint da vont daou-ha-daou da gizidikaat ha da harpiñ an dud a vicher frank, ar genwerzherion hag an artizaned a glask lakat ar moned aes e pleustr. Sikouret e vo an dud a vicher ken a-fet an emzalc'hioù mat ken a-fet al labourioù da gas da benn evit degemer razh

ar pratikoù hag an implijerion. Er pleustr o do ar gannadourion-se da renabliñ an tier a zegemer tud (ag ar renk ERP 5) ha da vont d'o gwelet evit roiñ titouroù personelaet d'o merourion. Ar stignad-se zo un taol-arnod e departamant ar Mor-Bihan. Goude-se e vo laket da dalveziñ e Frañs. Dre duta ar gannadourion hag o sternidi e-pad o c'hefridi e ra an tolpad-kêrioù ar pezh en doa grataet gober a-fet ar moned aes en tiriad. ♦

🌐 **Evit gouiet hiroc'h** : [fichenn-bost klok er magazin 360 enlinenn.](#)

